

DAN ESCOP SANTEL AN AOTRO LAOUËNAN

Deut da welet e vro ag e gerent

AN DRIZEC A VOEREN 1885.

WAR DON KELVEN

Lanhuon zon da gleier aru eo da vugel :
War dro dao ugent vla zo missioner zantel
Da brezec an awiel a c'hez da broïo pel
Gantan e man graz Doue, deut eo Escop zantel.

Lanhuon bezomp er joa tridomp hon c'halonno
Doarn an Escop zantel a zo leun a c'hrasso
Da Rome e c'heo diredet da gad ar Pap zantel
Heno man kador Sant Per; ar fe nal ket mervel.

Eno man war ar roc'hel plantet Iliz Doue
An dud fal a bep amzer a deus a bep koste;
Met dorojo an ifern na deui ket a ben
Dorn Doue a zo ganti, ag a vo da viquen.

Doue ro nerz ha kalon dan Eskibien zantel
Da brezec an awiel a dost evel a bel,
Da scolian ar vugale ma vont kristenien vad
Ma c'heulfont lezen Doue ag ali man ha tad.

An oll veleien zantel stag deuz an Eskibien
A deuz Pap Leon trizec dre c'hras Doue e ren
A vessao an devet roet d'he gant Doue
Allaz bleizi connaret a glask tagan ane.

Deut oc'h evit an eil gwec'h, da voelet Lanhuon
An oll a zo evuruz joa vraz en ho c'halon
Voelet touez ho vugale un Escop ket disket
Ebaz e ger a Baris ar priz bras a neuz bet.

Ho mam kristen zo maro, ho preur ag e vugel;
Nimp a zo ho pugale ive Escop zantel,
Nimp o kar ag ho karo gant an oll veleien
Bugale ker Lanhuon no ankoefomp biken.

Ho penoz a c'houlennomp breman, Escop zantel,
Nimp a vo c'hoaz glac'haret ma het d'ar broïo pel
Hon aluzen, hon feden, missioner zantel,
A po a greis hon c'halon, ken a vo red mervel.

En evo e tiskifet demeuz ho labourio,
Ha meulodi da Doue da viken c'houi gano
Pedet evit ho keren ive ho mignonet
Ma c'helfomp er baradoz un de en nem gwelet.

Y. HERNOT.